



CHANSON NEVEZ.

1.

Cousquet out ma speret mes poent eo difuni
Ha clasq c'hoas ar voyen da zont da combati
Attaquet ê hon repos gant peder femelen
Ret eo enem armi ha dont de n'em difen.

2.

Unan demeus ane a lare un dewez
Greomp-nin ur chanson ma teir camarades
Da dressa ar werset en ho dillat
Nin a rayo deze bremà peb a flipat.

3.

Chetu n'em assamblet ar peder plac'h yaouanq
Da ober ho chanson herwe ho santimant
Aoale'h deus a rimou gante so n'em gaët
Mes allas ! ar bon san henes ne medi quet.

4.

Attaquet omp gante en un etad fesson
Ha laquet hon hano da bourmen ar c'hanton
Ha depeignet hon bue en ur stad a fallagriez
Nemert ar sort a ve erfor na elle dont er mêz.

5.

Ret evije plac'het e vijach o havreal
Pe e voac'h conseillet gant an teod infernal
Da vean n'em fouret en breuiez ar c'hlaquennou
Marteze o po queus da darn heus ho comsou.

6.

Eneum resolvét oc'h a enep ar werset
Gant cals deus a venjans ep bean meritét
Nin ne n'omp quet coupabl m'oc'heus quement a soufrans
Ret evo dec'h gortos heuvriou ho tilivrans.

7.

C'houi a dlefoa , plac'het enem humilian
A gortos ar bonheur da dont d'o priata
Bale hent ar vertu gaut prudans ha douç ter
Ha marteze ho po peba potr evit saler.

8.

Gout a ouzoc'h penos eheo an humilite
Mignonez dar vertu ive dar garante
Na neo quet gant fureur , gant maliç inhumen
Eheo ma c'hacquisitet quentà amourouzien.

9.

Me voar erfat penos pa deuan da compren
Pa ve cals deus a hoant ehe diez tremen
A wijou ar planeden a chanch en un instant
Ha marteze neuze ho po peb a c'halant.

10.

Na petore ide o poa-hu quemeret
Na pessort nation a nefoa ho queleppet
Da dransport ho mare bete hon goeleou
D'ober usach a pot-cambr ebars en hon botou.

11.

An de varlerc'h ar beure nin a voa surprenet
O voelet en pe guis evoa hon boto rentet
Ma conclujomp neuze , ma moamp-nin lavaret
Bet so cur bar orag en pad ma voamp cousquet.

12.

Mes evit quement-se nin voa freneziet
O clasq gout a besbro evoamp-nin serviget
Mes ebars en doetans nin ne n'omp quet bet pel
Gout a ouzoc'h ar merc'het ne n'int quet vit tewel.

13.

Na gredet quet plac'het evemp-nin en coler
Evit eur banac'h dour nin ne n'omp quet tener
Eur veag-al pa deufet er sort occasionnou
Tachet da derc'hel sec'h mar gallet ho botou.

14.

Nin ne n'omp quet fachet demeus ho trubuilhou
Me meus ne garemp quet bean en ho plaçou
Mes evit quement-se eno ezoc'h manquet
Neo quet ebars en treid a ve an amouroustet.

15.

Rac-se eta plac'het me meus an esperans
Ne scringfet mui varnomp ho dent a vedizans
Henès a voa eun tourmant evel eur bar corbon
Hac a dissirito pa chanchou ar saizon.

16.

Na guemeret jamès re a superbite
A wijou en un instant e chance a zegre
Hirie oc'h en triomph carguet deus a joaiou
Varac'hoas marteze heus sujet a daërou.

17.

Ha pa vec'h preferet gant guened ha graçou
N'och quet sur ane bete fin ho deyou
Ne poa nep avantach o trouc-coms a hanomp
C'houi na n'och quet ive goel metal evidomp.

18.

C'houi oc'heus eur chasse hac a so ranverset
Ar c'had eus o redec, ar c'hy oc'heus tapet
Groet guelloc'h jujamant, ha choazet woelloc'h parti
Disquet pelec'h tenna ha piou da exantin.

19.

An nep neus groet ar son a so eur marc'hadour
A prefer mui ar guin evit ne ra an dour
Ma ne houlet quet credi marteze c'houi a voelou
Hac e so guirione eun darn deus ma c'homsou.

20.

Me so eun den yaouanq o tremen ar c'hartier
Hac a so a boan din enem denn a vizer
Ebars em marc'hajou nemeus nep avantach
Biscoas n'on sortiet deus ma bugaleach.

21.

Contant on o wewa en un degre izel
Avoalc'h a vadou ameus evit mervel
Eur veach an amzer pa ve crev ar sêzon
E ra din plijadur rein un dems d'am c'ha'on.



F. LECAVALIER.